

BOKET AR YAOUANKIS

RIMET AR BLAVEZ 1894

1^e Couplet

Eur zulfes deus ar mintin, oan o lea va leoriou
Me glev ar lapouset, o cana er bodou
A dre brenehou ma hamb, remerken ar hlizen
A heol brillant ar mintin, o tol e sclerijen.

2^e Couplet

Tridal a ra va halon, o klevet a lapouset
Dre o an meuleodus, ac o moues allacouret
Pere a lavar dinme, fasil mad dreo moues
Poënt eo dide den yaouanc, dont da choas eur vestres

3^e Couplet

Meus ket gret reflexion, vit clevet kementse
Memes tra on nem laket, da ober eur bale
Evit kemer an er fresk, deus dousder ar mintin
A meus laket em speret, da vonet em jardin.

4^e Couplet

Da gontempli ma fleurio, e mesk a louzou fin
Dre o deillou arrozet, gant glizen ar mintin
A dre mo haven ker gai, a meus bet despunet
Unan demeus o bep sort, da formi eur boket,

5^e Couplet

Pehini ameus plaset, van eur prenest em zi
Refreski ra ma halon, demeus e gontempli
Pa oan deus e admiro, a meus bet remerket
Va fidella camarad, o tonet dam gueleit.

6^e Couplet

Evit donet d'am pedi, da vont sembles gantan
Da bardona d'eur chapel, a zo er baros man
A goude fin an offiç, a meus bet remerket
Eno var ar blassen, et kichen ar veret.

7^e Couplet

Ar gaëra demeus ar fleur, a zo bet var ar bed
Me garfet e fossedi, da lacat em boket
Kaëroh eo evit a roz, ac an oll fleurennou
Deus a guement a heller, gueleit ar jardinou.

8^e Couplet

Na neus na baum nac ezans, capabl da dol eur houez
Evelt da fleuren gaër ze, ma ne de aloës
Mes defians vras a meus, pa velan e deillou
Gant an aoun matrese, ve poëzon e griou.

9^e Couplet

Pep deillen anezi, a zo evel pentel
Gant ar haëra penturiou, a gaver var ar bed
An aour ac or perlez, ar haëra ru a guen
Memes ar mein presius, zo netra ne hichen.

10^e Couplet

Hounes a zo caëroh, evit ne deo a loar
Brillantoh evit a eol, dre e domder pa bar
Ma buez en antier, acan oll baperiou
Zo netra evit dessign, rouanez ar fleurio.

11^e Couplet

Desir a meus d'onnoùs deoh, petra eo ar fleuren
Eur plah yaouanc coant meurbet, vargornic an dachen
Gant eur vizach laouen, ac eur zellou contant
Caëroh, ei vit an astrou, demeus ar firmanant.

12^e Couplet

Gant eur zellie a gorn, neur drei va daou lagad
Eneur douch demeus e vrech, me lar dam hamarad
Sel aze camard, eur gaër a plah yaouanc
Hounes a fat va mignon, a blich dam zantimant.

13^e Couplet

Mar mize hardiegues, deus ma intention
A oam et de zaludi, contant bras ma halon
Me garfe cavet an tu, da glevet an doare
Pe sort renk a zelh ar plah ac a be sort ligne

14^e Couplet

Kerkent a oan respontet, gant eun den venerab
Oa eur plah honest a fur, eur famill respectab
E hounzou e demarchou, a blich dan oll dud fur
Eur galon an teners, eur plah a blujadur.

15^e Couplet

Eurus ezon va den mad, da laret deoh mersi
Da vea roet dinme, an de paign anezi
Gant fians eno comzou, a meus cales a joa
Me ze da lavaret deoch, kenavo ar henta.

16^e Couplet

Ben eur pennad goudeze, on daou neur bourmeni
Gant cals a sivilite, me ya da zaludi
Dont z rad da houl enor, deus o compagnoues
Mar de opolonte vad, da barliant asambles.

17^e Couplet

Deus enem atreteni, gant cals a blujadur
Diou heur or beus tremenet, coms deus on avantur
Neuze hen an disparti, teump denem zaludi.
Gant an esperans vad, denem zalempredi.

18^e Couplet

Emen brometet or beus, keit a vemp e bue
Da gauet cals a respet, an eil vit eguile
Dont denem zalempredi, bepret en honestis
A da basseal gant joa, deou or yaouankis.

19^e Couplet

Neuze e vemp bet on daou, epad daou vla anter
© roula or yaouankis, gant furner a dousder
E pep leoh pa nem gavemp, zantemp ber an amzer
Pa meus met fidelite, a carante dener.

20^e Couplet

Deut mare ar pardonioù, me lar dar fumelen
Dar beuzec deus a vis eost, dont da pardon Cleden
Neuze a respontas din, na vize ket manket
A certain a virionez, e devoa din laret.

21° Couplet

Don devez assinet, me a ya dar pardon
Trionfant ma speret, a joaus ma halon
Pa oan erru eno, a meus e remerket
A oa en compagneuz, e hamaradezet.

22° Couplet

Kaeroh vit an eol brillant, pa losket sclerijen
Ma remerkas ma mestres, bars e porchet Cleden
Kaeroh vit eur berlezen, ac ar fleur da viz mai
Me remerkas ma mestres, kichen an nor gostai.

23° Couplet

Gant eur liou ker tener, eur horf ker delicat
Eur zellou ker joaus, glas ye e daou lagat
Hei ar vrava plah yaouanc, a guement zo er bed
Contantamant ma halon, joaustet va spered.

24° Couplet

Na neus den evit compren, peguement e haran
Goned a deus va halon, pa nem gonsideran
E ne hompagnonez, ma va oll gontantamant
Ac e foltret dirazon, a zo ato prezant.

25° Couplet

Goude ar gousperou, on daou omp nem gavet
Ker contant a daou El, em andret prometet
Pa oamp enem remerket, or boa kement a joa
An dour enon daou lagat casimant vel gouela.

26° Couplet

E bars en andret ze, sables gant ma mestres
A ma passet eno, tout va abardeyez
Carout a ran mignonet, rei dehu da gompren
An daelou or boa scuillet, mesch ar homzou laouen.

27° Couplet

Enor or beus prometet, gant joa mesk on daelo
Eur guir garante barfet, da betec ar maro
Deus a hane dan illis, dirac Doue omp et
Doffri or promessayou, dar Verhez beniguet.

28° Couplet

Neuze me e honduas, da betec ty e zad
A glahar enor halon, o tont denem guitad
O tont a hane dar guer, occupet ma speret
O sonjal ne freposiou, na zanten ket kerzet.

29° Couplet

Mes tostad a ra an heur, ma vemp dispartiet
Ben eur pennad goudeze, a recevas billet
Lennet a meus varnezan, comzou meurbed houero
Ret a va dit partial, o zervich'an drapo

30° Couplet

Ne ket o hont da zoudard, ema va nehamant
O tilezei va mestres, ema va oll courmant
Mes ken evit partial, on et betec e zi
Dre gomzou an tenera ei deut dan honsoli.

31° Couplet

A dre lizerou charmant, a receven alies
Am boa consolation, eus a beurs ma mestres
Neuze nem laken do len, pa mize liberte
Berroh caven an amzer, o tremen ma honje.

32° Couplet

Eun tam roc'h ma honje, a meus bet recevet
An ord a beurs ar cheffou, da vea disarmet
Neuze gant impressamant, me scrivas eur lizer
Evit annons dam mestres, a oan erru dar guer

33° Couplet

Ben pemzec de just goude, a oan e barz e dor
Da eiz heur demeurez a noz, e houlenen digor
Birvi a ra ma goad, neur antren bars en ti
A kerkent coz a yaouanc, int deut dam ambrassi.

34° Couplet

Ma hunan pareillamant, a meus laret dezo
Joa a meus eus o kulet, mar em harit ato
Va speret betec o ty, aliez a zo bet
Abaou'ar vech diveza, a meus me o kuitet.

35° Couplet

Ni zo ivez contant bras, ec'h n'em gavet er guer
A hervez an aparans, peus ket bet a viser
Credit mad en assurans, keit og bet en arme
Na neus gret nemet cressi, vidoh or harante.

36° Couplet

Neuze a meus esperans, cavout pero en temsor
Pehini o peus savet, a mæguet gant enor
A houï ma mestres fidel, gredan parfetamant
Da laret emoh bepred, er memes santimant.

37° Couplet

Ma speret a va memor, oa ganeoh en arme
Deus secrejou ma halon, houï bossed, on alhoue
Houï an hini a garan, ac a garin bepred
Vit gant ma bolonte vad, ne vemp ket separed.

38° Couplet

Mar emon do santimant, velt ezoh dam hani
Goulenit demeus o tud, conje da zimezi
Me meus annoncet dam re, pa oan erru amam
A gant o bolonte vad, meus conje pa garan

39° Couplet

Vit deus a beurs ma hereut, no ket ampechamant
Panonsin de or helou, a vont meurbed contant
Car na neus den er bed man, o ve do faltasi
Houï a zo do zantimant, kerkouls a dam hani.

40° Couplet

Ben eun neubeut devosiou, me nem gao ardare
Evit clevet ar respont, a pobet digante
A pa vo do bolonte, ni ayeio dan illis
Evit commans echui, boket ar yaouankis.

41° Couplet

Gant consantamant on tud, demeus an daou goste
A gant o bolonte vad, an eill ac eguile
Ezomp bet dimezet, ac eureujet on daou
Gras deomp ni da nem garet, evelt guir briejaou.

42° Couplet

Cetu echu ar boket, demeus ar yaouankis
Laket or beus den erren, ruban an honestis
Breman pa zeo echuet, zerrad a paket kloz
Me a lak bars em hichem, em guele deus a noz.

43° Couplet

Gant gras Doue ac or poan, e teufomp da veva
A houï yaouankis fidel, tached do imita
Deut denem hentchi bepred, gant eur guir honestis
A houï o po plujadur, tremen o yaouankis.

44° Couplet

Diou rozen deus ma boket, zo gouenvet a maro
Da renez a meus scuillet, meur a verad daelo
Unan ane zo chomet, ebars e Bannalec
Ac an hani al a zo, ebars en Col'orec.

45° Couplet

Ar peur rest anezan, a zo gueneñ bepred
Conservet epars em zi, gant cales a resped
Gout a ouzon a dro zur, eo an Autrou Doue
Mest da guemer a da rei, hervez e volonte.

46° Couplet

A houï merhet yaouanc, a galon me o ped
Na zeut ket da re fiout, e preposiou goazed
A mar zeufent da goms deoh, enep an honestis
Lavarit de ep damant, mont buan var o his.

FRAGILITE AN DUD YAOUANC

Var eun ton rigolo

Ni boa eur boguic yaouanc oa duman guenemp-ni
Oa commanset do gana, mes brema na ra mui
Eun nosvez goude e goan, o tout eur zonzj ne ben
Me a renk mont en noz man, var digare pourmen.

Me renk ober eur bale, eun droyat var ar mez
Da glask e merh Perina, digant a intanvez
Pe guir on hanvet coguik, gant oll dud ar vroma
Me garfe caout eur bolez, vit nem zivertissa.

Pa meus tapet an hano, a goguik vit partaj
Vo ret din caouet parrez, da gomans ma menaj
Perin merh an intanvez, hounez a zo dam grad
Kannerez a danserrez, brillant e daou lagad.

Bonsoir dehu intanvez, setu me deut exprez
Da glosk o merh Perina, da hanter tieguez
Rac keit a ma vemp yaouanc, or bo contantamant
A plujadur a sables, ep chagrin na tourmant.

Ma merh me zo abredic eur blavez hoaz
Mar de contant ar buguel, me na ranket a gaz
Kousket eo ene guele, er pen dan traon a ti
Monet a ran de havet, da houllent diganti.

Arsa ma merch emezi, na din me levered
A houï zo contant paouric, da gavet eur pried
Berroh kafet an amzer, bremaa epad an anv
A toma doh o kuele, goude pa zeui ar goanv,

O ya va mam emezi, certain me zo contant
Demeus a greis ma halon, da gaout eur pot yaouanc
Mar dai caner a dansser, ac eur pot délicad
Neuze a meus esperans, d'ober tieguez mad.

Neuze ar pot yaouanc man, a zo jaoüs a guie
Ac a zistroas dar gaer, hed an hend neur gane
Penos eta yan goguic, te zo bet o vale
Eun tam mout diverzat, o hanons domp an de.

Neuze zistroas ouzin, gant eun air da hoarzin
Mar de guir on me koguic, houï so eur louar fin
Houï pefe eur vadelez da vont breman ractal
Da anons ma dimezi, betec ar presbital.

Ar hoarz var ma muzellou, pa non ket vit miret
Ya va mignon emezan, me rei ze na reket
Monet a ran evidoh, betec ar presbital
Rac merh an intanvez, evidoh ne ket fal.

Bonjour doh autrou person, me a zo deut gant prez
Da hout a houï zimefe, eur hok ac eur bolez
Pere o deus dezir braz, da vea unisset
Eun tamic a zo deja, o deuz enem choazet.

Neuze a respontas din, ive neur vous hoarzin
Deus aman ebars er zal, kemer eur bane guin
Eroët ezout bepred, eun tamic de kevyer
A teus klevet jamais, ve dimezet ar yer.

Ezkuzit autrou person, mar meus drouc parlantet
Malheur eo dandud yaouanc, pere zo leshanvet
A re a barlantan doh, a zo daou zen yaouanc
A zezir be unisset, velt diou galon gontant.

A re a barlantan doh, zo mal a fumelen
A zezir bea staguët, gant ar memez chaden
Unan ane triveh vla, an hani all pemzec
Zo pel zo braz en hirvoud, hortoz be dimezet.

Ma et dar guer ma mignon, lar de dont dan illiz
A me o interrojo, var dern a hatekis
Pa orgoulet digante, a na ouient netra
Demeus ar zacramanchou, a re brinsipalla.

Filet dar guer bugale, evit eur bloa pe daou
Da hortoz ma pot desket, dern ar zacramanchou
Neuze zavas e ziou skoa, me a gred a zonzje
Eun druez eo emezan, dimezi bugale.

Veuze a zeuont dar guer, o daou eneur ouela
Ret a vo demp emezo, donet da studia
Ret a vo demp studia, couls an de ac en noz
Mar ouefomp ket re neve, ni zeskoa re goz.

Tri pe bevar miz goude, a ya an intanvez
Da gaout an autrou person, da lard dan tol evez
Rac va merh zo languissant, eun tamic zo deja
Seul vui avans e hlenvet, ya bepred var vella.

Setu an outrou person, dezi neus lavaret
Lavarit dezo dont hoas, ac a vont dimezet
Houï a fad daou zen yaouanc, a lavar ar person
A oar nem gonvertissa, ep mont dar mission

Ar memez tra ezint bet, dimed ac eureujet
Gras da vea eüruz, keit a vont var er bed
Bonheur a zeziromp de, keit a von er bed ma
A goude pa vont maro, er gloar de jouissa.

FIN

CORENTIN BOUARD.

Tous droits réservés :

GUILLERMIC Yves.

CHANSON NEVEZ

Boket an Euret

1^e Couplet

Dont a ran da houlen iseus diganeh compagnones
Evit ma canimp eur boket ma vemp oll assambles
Mar plich ganeh dont dam selaou en enor dan dachu den yoane
A zo bed eureujet hirie deus toal ar zacamant.

2^e Couplet

Beza zo eiste tremenet a boe ma voan avertisset
Na da zont betek ama evit azista an euret
Pa voa naveur hanter zonet hac ar vreg yoane guisket
Evit mont betek an ilis evit bez eureujet.

3^e Couplet

Ar paot a enor hac ar plah a enor zo en kreis an ti
Pa deus groet o hompliment zo prest de hondui
Mes honnan zo eur plah fur eur plah eleuvet mad
A deus astennet e fajou evit mont betek e zad.

4^e Couplet

Rei a ra dezon eur briata deus a greis e halon
Pa deus acordet dezi e venediction
Dizrie a ra deus e mam pehini neus e ganet
A zo bed en risk e buez deus e lakad er bed.

5^e Couplet

Rei a ra dezi eur briata an dour ne daoulagat
Petra dall diman skuil daerrou pa renkan ho kuitad
Quar me zo choajet gant Doue vit chanch position
Ho tond a'ho kuitad ma zud kes ai glaharet ma halon.

6^e Couplet

Dont a ran da laret adieu da di ma mam a ma zad
Leh mar hon bed maguet sansourei hac ive eleuvet mad
Lezet gane ma liberte dont dan ebad a dan dans
Mes breman renkan dilezel ma ol aeustumans.

7^e Couplet

Chom a rin gant ma labour a lezel an dançou ze
Me bedo an dud da vont brema da di Doue
Ken evit achui ar zermou deus ar fidelite
A zo entre an diou durzanel ar rest deus ho buez.

8^e Couplet

Na pa hai barz er quer ma hai roët ar boket
Da verh hena deus an timan zo hirie eureujet
Ar verh hena deus an timan zo eureujet hirrie
A neus ket ur plah er baros unan ken fur a hi.

9^e Couplet

Pebeus devez kaer evidoh hirrie eta greg yoane
Partout dre leh ma tremefet ver deh obeissant
Deus ar parkou hac ar prajou ve guelet ar zebant
Oll a guitafai ho labour vit mont d'ho kuele greg yoane.

10^e Couplet

Neuzai teuyo ar varhadourien a gantai peb a baner
En neur dorhai ho daoulagat evit ma velfont scler
Evit guelet an diou famil zo assembles unisset
Evit ober anoudegues deus ar Marhad a peus gred.

11^e Couplet

Na pa velon en pesort stad nem lag ar vreg yoane
Prest a zint dont de regali deus a sort e deveus hoant
Profitet demeus a deman ho vreg yoane eureujet
Ar zunman zo evidoh mes e ben all ne vo ket.

12^e Couplet

Souhañe ran deh ar yebet eve prosperite
Chanj a bonheur n'ho menaj hac union entrezai
Mes mar deu ar maro da lakad fin d'ho buez
Souhaitan dezai chanj padus en gloar an eternite.

GUILLERMIC.